



Jorj BELZ : Treizher pinvidigezhioù bro Wened

Ganet eo bet Jorj e Plouharnel e 1951.

Jorj a zo bet kelenner brezhoneg, istor ha douaroniezh, soner ha kaner eo ivez, dastumer hag enklasker.

Buhez en deus roet d'ar strollad **An Drouzerion**, krouet e 1974, e lec'h ma oa bodet tud a bep seurt oad eus remziadoù disheñvel. Graet en deus ul labour dastum a bouez ha treuzkaset tonioù ha kanaouennoù hengounel a vro Wened. A-drugarez dezhañ ez anavezomp teñzorioù kanet gant tud evel Job Kerlagad pe c'hoazh Jean le Meut.

Embannet en deus, e div levrenn, un dastumad kanaouennoù eus bro Wened. Enno e kaver, estreget ar c'homzoù hag an tonioù, skeudennoù kanerien ha dañserien. **Sonamb get en Drouzerion** (emb. Hor Yezh).

Ur mailh eo war istor al lennegezh e brezhoneg ha skrivet en deus bet meur a bennad er gelaouenn **Hor Yezh**.

Eñ eo en deus strollet ar pezh a oa bet dastumet gant Pêr ar Go eus Baod (1860-1941) el levr *Œuvres de Pierre Le Goff (1860-1941) : Proverbes bretons du Haut-Vannetais, les mystères bretons, petite histoire littéraire du dialecte de Vannes* embannet gant Skol Uhel ar Vro e 1986.

Anavezout a ra mat-tre ivez oberoù ha buhez **Yann Bêr Kalloc'h**, skrivagner eus Enez Groe.

Ingal e ra prezegennoù diwar-benn orin hag istor ar pardonioù e bro Wened, diwar-benn al lidoù, ar relegoù, ar c'hantikoù hag ar feunteunioù. Aozañ a ra ivez stajoù kanañ. Ezel a-enor eo eus laz-kanañ paotred bro Bondi **Kaloneu**.

Brezhoneg eo yezh ar gêr, ar pezh a ziskouez kempoell e enouestl dibleg evit Breizh hag ar sevenadur.

E vamm a oa kemenerez ha fererez koefoù, n'eo ket souezhus neuze en defe dastumet gwiskamantoù ha koefoù. Un diskouezadeg a zo bet dalc'het e Pondi ha Jorj a oa eno evit displegañ ha respont da c'houlennoù ar weladennerien.

Ur vuhez a-bezh gouestlet d'an dastum ha d'an treuzkas e kement stumm a zo evit mad sevenadur ar vro.

Jorj BELZ

Le Passeur de mémoire du Pays Vannetais

Né en 1951 à Plouharnel.

Ancien professeur de breton et d'histoire géographique, il est musicien et chanteur mais aussi collectionneur, collecteur et chercheur.

Il a été la cheville ouvrière du groupe **An Drouzerion**, groupe créé en 1974, où se retrouvent plusieurs générations. Il y incarne un travail de collectage et de passation du répertoire traditionnel du pays vannetais. Il a fait connaître et transmettre les trésors chantés de personnages comme Job Kerlagad ou Jean Le Meut.

Il a publié une collection de chansons du Pays vannetais en deux volumes. Ces livres contiennent les paroles et musiques et sont agrémentés de photos des chanteurs et danseurs. **Sonamb get en Drouzerion** (Ed. Hor Yez 1985)

Il est un connaisseur reconnu de littérature en langue bretonne, et a contribué à des articles pour la revue **Hor Yezh**.

C'est lui qui a réuni la collecte impressionnante de Pierre Le Goff de Baud (1860-1941) dans *Œuvres de Pierre Le Goff (1860-1941) : proverbes bretons du Haut-Vannetais, les mystères bretons, petite histoire littéraire du dialecte de Vannes* édité par l'Institut Culturel de Bretagne en 1986.

Il est également un spécialiste reconnu de **Yann Ber Kalloc'h**, écrivain de l'île de Groix.

Il anime régulièrement des conférences sur l'origine et l'histoire des pardons en pays vannetais, sur les rites, reliques, cantiques et fontaines ainsi que des stages de chants.

Il est membre du chœur d'hommes du pays de Pontivy **Kaloneu**.

Le breton est la langue de sa famille et montre ainsi la cohérence de son engagement sans faille pour la Bretagne et sa culture.

Sa mère était couturière et repasseuse de coiffes, et c'est tout naturellement qu'il a réalisé une collection de costumes et coiffes qui ont fait l'objet d'expositions à Pontivy il a été très présent pour animer et répondre aux questions des visiteurs.

Toute une vie au service de la conservation et de l'expression de la culture bretonne dans toutes ses formes.